

KIS-737 – Unded hag allded. Gl. *différent*

(GE – 25 09 01)

Bezef daou c'hevell. Evito da vezañ heñvel an eil ouzh egile, ez eus etrezo un nebeut disheñvelderioù, diforc'hioù bihan a ro an dro d'o dispartiañ. En ur yezh resis, e stader ur *c'heñver a allded* (Gr. *eJterovth*", Gl. *altérité*) etre beziadoù heñvel a du 'rall : "*Diforc'h a lavarere ez eo ar pezh a zo all en ur vezañ un en ur c'heñver ; n'eo ket hepken dre an niver, met dre ar spesad, ar genad pe dre leteñvelded* ¹." Meizad an allded a saveler dre geñveriañ daou veziad. Ur meizad daveadel ez eus anezhañ. Bezef un teskad ergorennoù a zo etrezo poentoù a unded ha poentoù a allded, da skouer ur banerad avaloù ; lavarout a reer ez eo boutin, *kevun*² etrezo ar spesad aval, ha *kevarall*³ o mentoù ketep, pe o livioù, pe o seurtadoù : anv a reer eus ur banerad avaloù a ventoù pe a livioù pe a seurtadoù kevarall. Mar kemerer bremañ ur banerad avaloù ha per, ez eo ar poent unded, ez eo boutin, kevun etrezo ar bezañ frouezh hag e lavarere ez eo kevarall o spesadoù : anv a reer eus frouezh a spesadoù kevarall pe, dre c'houstav, eus frouezh kevarall.

Un degouezh dibarek a zleer desellout, hini an teskad ergorennoù peurheñvel, eleze hep poent allded ebef etrezo, da skouer ur sac'had kanetennoù a un vent, a un liv na c'haller diforc'h hini anezho diouzh ar re all dre nep doaread. Koulskoude, mar kemerer div anezho, e c'haller lavarout "houmañ" eus an eil, "an hini all" eus eben ha stadañ dre se ur c'heñver a allded etrezo, lavarout enta ez eus anezho "kanetennoù kevarall". Hogen ar c'heñver a allded, ar gevarallded ne zoug mui war un doaread eus an ergorennoù, met war an hennad ez eo pep hini anezho. Kent mont pelloc'h, greomp un distro istorel war ar gudenn.

¹ "*Diaforav levgetai o[sΔe[terav ejsti ta; aujtoν ti o[nta: mh; movnon ajriqmw/ ajllΔ h] ei[dei h] gevnei h] ajnalogiva/*" (ARISTOTELES, *Meta.*, IV, 9, 1018^a, in LALANDE, *Voc. Phil.* 233-234).

² A-zivout saveladur hag amzaeladur Br. *kevun* ha deveradoù, sl. KIS-471, La-10, pp. 266-267, 271 hh. ; KIS-474, id., pp. 282-284 ; KIS-501, id., pp. 393 hh.

³ A-zivout saveladur Br. *kevarall*, sl. KIS-578, La-12, p. 106 (ma termer etre *kevall hag arall*) ; KIS-587, id., p. 156, n. 1.

Ar skolastik a lakae kemm etre *specie differentia* (Gl. *différence spécifique, intrinsèque*) a verk an allded o tougen war an doareadoù (Br. *kevarallded doareadel*) ha *numero differentia* (Gl. *différence numérique*) a verk an allded o tougen war an hennadoù o unan (Br. *kevarallded hennadel*). LEIBNIZ a selle ar c'hemm etre an div *differentia* evel ur c'hemm betek gouzout, o vezañ, emezañ, ma vez bepred diforc'hioù enien, doareadel etre an hennadoù pegen heñvel bennak ma tiskouezont bezañ. EGGER a arzaelas lakadenn LEIBNIZ : “*An digemmañ etre an diforc'h numero hag an diforc'h specie ned eo ket unan betek gouzout hepken. Mar lavaran daou aval, ned eo ket peogwir ez int disheñvel, met daoust ma'z int disheñvel. Ar gevarallded doareadel pe enien zo ur skoilh ouzh an niveriñ. Er jedoniezh e tizher an eorizh : daou boent, div linenn*¹.”

En devoud e ra EGGER anv eus ar c'hemm diarsell o kevaraezañ an niveriñ — hag estreget an niveriñ evel ma welimp. LEIBNIZ a solie e lakadenn war ar c'hantouezañ : ar beurheñvelded a greder stadañ etre an traoù merzhet a steuz bepred pa gaser pelloc'h an imbours'h kantouezel. Un durc'hadur all zo d'an diarsell ampleget gant arzaeladenn EGGER : an dezevoud, o tiskregiñ an derc'hañ diouzh ar merzhout, a ro emrended dezhañ : an derc'hañ a baouez a vezañ kantouezel, a vezañ amparus d'ar werc'helezh trael evit amparañ ur werc'helezh antrael a denn he c'hemez eus an dezevoud e unan. Ar gemez antrael-se a c'hell, etre re all, bezañ hini ar Boelloniezh, ent dibarek hini ar Jedoniezh². Va mennoz en notenn-mañ n'eo ket adober studi ar gevarallded er Jedoniezh na menegiñ an termenou brezhonek bet savelet d'he dezgeriañ : graet eo bet al labour-se gant YBAN e KIS-578 dreist-holl (sl. n.æ traoñ ar bajenn-mañ) . A-gostez e lezan ivez kemeradurioù prederel Al. *Differenz* gant HEIDEGGER¹ ha Gl. *différence, différence, diaphore* gant DERRIDA.

E yezh ar pemdez e klever : *avaloù disheñvel, frouezh (a seurtadoù) disheñvel*. Anat eo ne c'haller ket ober gant *disheñvel* er yezh resis evit merkañ ar gevarallded, peurgetket ar gevarallded hennadel (a zo ar c'heñver a allded etre ergorennoù desellet evel *peurheñvel*). Diouzh e du,

¹ “La distinction de la différence *numero* et de la différence *specie* n'est pas seulement provisoire. Si je dis *deux pommes*, ce n'est pas parce qu'elles sont différentes, mais *quoique* elles soient différentes. L'altérité qualitative ou intrinsèque est un obstacle à la numération. On atteint l'idéal en mathématiques : deux points, deux droites” (V. EGGER, in LALANDE, *Voc. Phil.* 234).

² A-zivout argraf ar *gwerchelezhioù antrael, jedoniel* pergen, sl. KIS-501, La-10, pp. 393 hh. ; KIS-548, La-11, pp. 301 hh. ; KIS-554, La-11, pp. 344 hh. ; KIS-578, La-12, pp. 101 hh. ; KIS-587, La-12, pp. 146 hh., 155-160 pergen ; KIS-613, La-12, pp. 298 hh.

¹ Sl. KIS-534, La-11, p. 180, n.2 ; KIS-578, La-12, p. 113 ; KIS-587, La-12, pp. 155-160

YBAN a verk an diegi o devez ar jedoniourion oc'h ober gant Gl. *distinct*, *différent* ha gant Br. *diforc'h* (KIS-578, La-12, pp. 101-102).

Meizad ar gevarallded hennadel a ro an dro da zigeriñ un diarsell all, stiet ar wech-mañ n'eo mui war geal an allded, met war hini an unded, oc'h arbouezañ n'eo mui ar gevarallded met an hennadelezh. Distroomp trema skouer an daou c'hevell. Mar sellomp ouzh pep hini eus an daou hep daveiñ d'egile, e lavaromp ez eus anezhañ un den dioutañ e unan, er yezh voas : un den diforc'h. *Diforc'h* a intenter amañ en ur c'hemeradur nad eo mui an hini arveret a-zioc'h : n'en ambreder ket evel diforc'h diouzh e vreur (o todiñ an unded a-gevenep d'an allded), met diforc'h ennañ e unan (o todiñ an unded a-geñver ganti he unan). Ar galleg a verk ar rikladur eus an eil diarsell d'egile dre ober gant daou adanv : “*les jumeaux sont deux personnes différentes (l'une de l'autre) — chacun est une personne distincte*”.

Diraezet ez eus amañ ur par devezout a ranker despizañ. Kreizet emañ war geal an *unded* — an unded enni he unan ha n'eo ket a-gevenep d'an allded, an unded ambredet hep amoug an daveiñ d'an allded. En ur ger : an unded ambredet evel o taveiñ dezhi he unan. War wel e teu ur c'hlom gwriziadek a'r spered, ur meni pleuskenn d'an devezout a gaver he dedaoladoù e lies domani : er Boelloniezh pa denner an enlenadelezh a-dre an daveadelezh², er Yezhoniezh pa saveler keal an emheñvelson, an emergeñverañ³, er Vevoniezh prederel pa bleder gant an hinienned hag an hevelepted⁴, en Denoniezh prederel pa voe donaet keal ar “bezoud den” evit diraez meizad an hanvoud¹ ha, gant HEIDEGGER, meizad ar menev², en Deologiezh nac'hadek pa embreg ar c'hevriñad ezvevennañ pep dave d'an allded evit stiañ e zarvesterezh war an unded³.

Kinnig a ran reiñ un anvad d' “an unded enni he unan, ambredet hep amoug an daveiñ d'an allded” hag e soñjan e Br. *gwehan* aa. & g., *gwehanded* b.

² Sl. KIS-093, La-05, pp. 69-70.

³ Sl. KIS-292, La-08, pp. 172-178.

⁴ Sl. KIS-540, La-11, pp. 210-241. Deurus eo an an doare ma teskriv Hans JONAS an hent heuliet abaoe ARISTOTELES evit digej “meizad an hinienn” diouzh “meizad niverel an unanenn” (p. 211).

¹ Sl. KIS-523, La-11, pp. 99-114.

² Sl. KIS-587, La-12, pp. 146-181, 172-180 pergen. Merzhomp ez eo devezout an *Dasein* a voe war un dro an hini a savelas an *Differenz* etre Bout ha beziat.

³ Sl. KIS-706, La-14, pp. 92-115, 104-105 pergen.

Br. *gwehan*, amprest Kb. *gwahan* « *aa.* different, distinct, independent, separate ; *g.* separation, difference, dissimilarity, distinction » (GPC 1556), intentadus ivez dre ul luniadur brezhonek : *gwe-* (*gou-*, *gwa-*) evel e *gwele*, *gweleviat* + *han* evel e *hanvout* — “**HAN** « autre que, différent de, hors de », [...]. Le *han* brittonique est rapproché du v. irl. *sain* « différent », du lat. *sine*” (DGVB 206), “**HAN** [...] o'r gwr. **seni-*, *senu-* ‘drosto’i hun, ar wahân’ ” (GPC 1818). Deveradoù diwar Br. *gwehan* a gaver endeo en Debegouriezh : *gwehanad*, *gwehanadur*, *gwehaniñ* (Gl. *variable aléatoire*, sl. JEDO II, *passim*).

N'eus kevatal gallek resis ebet da Br. *gwehan* er ster a ginnigan reiñ dezhañ amañ. Hervez an dro e c'hallfed e dreiñ dre Gl. *distinct*, *différent*, *Autre* (e ster LACAN ha prederourion 'zo⁴). Merzhomp an arvar a enepster a ve oc'h envel *Autre*, *Amgen* an unded ambredet kuit a zave d'an allded ! En eneb, e Br. *gwehan* e kennot *han* disrann an un diouzh an un en doare ma klever Br. *hanvout* evel "an un o vout e-maez an un".

ADNOTENN – Treiñ Gl. *différent*

Ur skoilh a gav alies an droerion war o hent eo lies kemeradur Gl. *différent*. Er yezh lennegel hag e yezh ar pemdez e roer peurliesañ da gevatal dezhañ Br. *disheñvel*, a c'haller arverañ bepred en ur yezh laosk, na oufe spiriñ avat en ur yezh resis. Da venegiñ eo ivez Br. *diforc'h* aa. "distag, disparti" astennet e arver betek ober anezhañ un termen hollek o tamglotañ e steriegezh gant hini Gl. *différent*, *distinct* ; ha *diforc'h* g. intentet evel an doaread pe ar c'hementad o tispertiañ daou hennad. Ezrevellomp enta kemeradurioù Gl. *différent* hervez ma tennont d'an doareadelezh, d'an hennadelezh pe d'ar gementadelezh :

ARVERIOU DOAREADEL

≈ pa lezer angeriet an elfenn geñveriañ : Gl. *avoir une opinion différente*, Br. *kaout ur meno all* ;

≈ pa vez geriet an elfenn geñveriañ : Gl. *avoir une opinion différente de celle de X*, Br. *kaout ur meno kevarall diouzh hini X* ;

⁴ Da skouer TANABE Hajime pa ra anv eus Jp. *tariki* “ar Galloud Amgen”, sl. KIS-730, La-14, pp. 275-310 *passim*.

≈ pa ambreder kevret al lies elfenn e kengeñver : Gl. *un ensemble d'opinions différentes*, Br. *un teskad menoioù kevarall*.

Da verkañ "an un meno(ioù)" e lavarer Br. *meno(ioù) kevun*, o kejañ eno gant Kb. *cyfun* "agreeing, concordant, of one accord, unanimous" ; da heul e teufe Br. *meno(ioù) amgevun* da zamgenster da Br. *meno(ioù) kevarall*, kuites d'ar yezherion da glevout pep a gemeradur gant an div c'herienn.

Da venegiñ ivez : Gl. *de différentes couleurs* (= "de couleurs variées"), Br. *liesliv, amliv* (kv. Kb. *amliv* "multi-coloured").

Degouezhioù dibarek :

≈ pa zoug ar geñveriadenn war doareadoù merzhadel pe luniadel a c'haller diskleriañ heñvel pe disheñvel (kenster : Gl. *dissemblable*) : Gl. *habillé d'une façon différente (de)*, Br. *gwisket disheñvel (diouzh)* ;

≈ pa zoug arver Gl. *différent* war lies ergorenn disheñvel ent verzhadel pe ent luniadel (er c'hemeradur-se e reer ivez gant Gl. *varié*) : Gl. *soldats habillés d'uniformes différents*, Br. *soudarded gant unwiskoù disheñvel (pe kevarall) en dro dezho* ;

Da verkañ an heñvelder verzhadel pe luniadel e reer ivez gant Br. *kevunded* (an *unwisk* zo ur *gwisk kevun*) ; alese e c'hallfed treiñ Gl. *différent* intentet er c'hemeradur-se dre Br. *amgevun* (damgenster da Br. *kevarall*) : Br. *soudarded gwisket amgevun*.

≈ pa zoare Gl. *différent* un dasparzh poentoù en egor pe en amzer (er c'hemeradur-se e reer ivez gant Gl. *divers*) : Gl. *en différents lieux, à des époques différentes*, Br. *e lec'h pe lec'h, e koulz pe goulz*. Gl. *s'asseoir à des tables différentes*, Br. *azezañ ouzh pep a daol*.

ARVERIOU HENNADEL

≈ o tougen war ar bivelezh : Gl. *une personne différente* (= "une autre personne"), Br. *un den all* ;

≈ pa zoare Gl. *différent* un teskad tud (kenster : Gl. *divers*) : Gl. *différentes personnes*, Br. *un niver a dud, meur a zen, lies den* ;

≈ pa zoare Gl. *différent* un teskad traoù (kenster : Gl. *divers, varié*) : Gl. *différents objets*, Br. *traezoù diseurt, traezoù liesseurt* ;

Lavarout a reer ivez Br. *un niver a draezoù, meur a draezenn, lies traezenn*. Un arliv a zismeg avat a glevfed a-walc'h gant Br. *tud diseurt, tud liesseurt*.

≈ pa gennot Gl. *différent* un disparti (er c'hemeradur-mañ e reer ivez gant Gl. *distinct, à part*) : Gl. *on dînait dans une pièce différente*, Br. *koaniañ a raed en ur pezh diforc'h*.

ARVERIOU KEMENTADEL

≈ pa lezer angeriet ar werzhad keñveriañ : Gl. *pour des distances différentes*, Br. *evit pellderioù all* ; resisoc'h e vez astenn d'an diskiblezhioù kementadel arver an termen a Jedoniezh Br. *anpar* ha lavarout : Br. *evit pellderioù anpar* ;

≈ pa vez geriet ar werzhad keñveriañ : Gl. *pour une distance différente de la première*, Br. *evit ur pellder kevarall diouzh an hini kentañ* ; an arver eus Br. *anpar* a skañva d'ar prezeg : Br. *evit ur pellder anpar d'an hini kentañ* ;

≈ pa ambreder kevret al lies kementad e kengeñver : Gl. *un ensemble de distances différentes* ; meur a ziskoulm : Br. *un teskad pellderioù kevarall pe un teskad pellderioù anpar (kenetrezo) pe un teskad pellderioù kevanpar*.

Degouezh dibarek :

≈ pa zoare Gl. *différent* un dasparzh gwerzhadoù anpar kenetrezo hervez o daveennoù en egor, en amzer pe diouzh un arventenn all, Gl. *“le document à reproduire réfléchissant avec des intensités différentes selon les points la lumière à laquelle il est soumis”*, Br. *“an teul da haneilañ o tsvannañ gant readoù amgement hervez ar poentoù al luc'h taolet outañ”* (GSTL, ¶ 1232) ; Gl. *“chaque composante de Fourier se transmettant à une vitesse différente”*, Br. *“ar c'hedrannoù fourierel o trehentiñ gant pep a dizh”* (GSTL, id.).

Da gontrol da Br. *amgement* e 'm eus kinniget *hegement* (Gl. *égal*). Oc'h adkemer ar frazenn gentañ a-zioc'h : *“Lakaomp e ve unvan liv an teul [da haneilañ], e tsvannfe gant readoù hegement al luc'h taolet outañ”* (KIS-474, La-10, p. 283).

Pa vez gwerzhadoù regel pe badel eus ar gwerzhadoù a lavarar *hegement, amgement*, e c'haller soñjal ivez e *hegeit, amgeit* : Gl. *des séances de durées égales / différentes*, Br. *dalc'hioù hegeit / amgeit* ; Gl. *une poignée de baguettes de longueurs égales / différentes*, Br. *un dornad gwialennoù hegeit / amgeit*.